



Degemer



Wikipedia

an holloueziadur digor ha frank, savet gant an holl.

Pennad dre zegouezh · Skoazell ha kregiñ ganti · Kumuniezh

91 464

fennad

103

implijer oberiant

Pennad ar miz


Carl von Linné, pe *Carl Linnaeus*, a oa mezeg, louzawour ha kelenner e Skol-veur Uppsala e Sveden en xviii^{vet} kantved. Gantañ e voe klasket rummata holl voundoù bev an Douar, en ul levr anvet *Systema naturae*, embannet e 1735. Diwar e labour e teu rummatadur reizhiadek ar bevien a zo en implij bremañ.

Gant Linné e voe roet da bep spesad un anv resis e latin, savet diwar daou c'her. Da skouer, *Homo sapiens* ("den a oar") evit an den. A-raok Linné e veze roet anvioù hir d'ar spesadoù, evit o diskrivañ. Gant skiantourien a veve er xvi^{vet} kantved, an daou vreur Bauhin, e oa bet savet ar reizhiad anvadurioù daouel a zo implijet hiziv, met gant Linné an hini e voe lakaet an diazezoù-se da dalvezout a-vras.

Ur Protestant deol e oa Linné, ul Lutherad, hag evitañ e oa ar vevoniezh ur studi eus ar bed urzhiet gant Doue. Krediñ a rae e oa bet krouet al loened hag ar plant gant Doue ha ne oant ket cheñchet abaoe krouidigezh ar bed. Ar spesadoù, evitañ, ne gemment ket, er c'hontrol diouzh ar pezh a voe displeget diwezhatoc'h gant Charles Darwin. Daoust da se e oa krog da gas ar skiant war un hent a bellae diouzh kelenn ar relijion. Un arc'heskob lutherat a damallas dezhañ bezañ dizoue.

Bez e voe Linné unan eus diazezourien Akademiezh ar Skiantoù e Sveden. Gantañ ivez e voe savet Liorzh Louzawouriezh Uppsala.

(Gouzout hiroc'h)



Carl von Linné.



Keleier

Gwelet ivez Keleier ar vro.

- 9-12 a viz Gouere : trizek den zo lazhet e tanioù-gwall e proviñs Almería e kreisteiz Spagn.
- 9 a viz Gouere : douaret eo korf Ali C'hamenei, bet penn uhelañ Republik islamek Iran, e Mashhad, goude obidoù meur a zevezh-pad.
- 4 a viz Gouere : deroù Tro Bro-C'hall 2026 e Barcelona.
- 4 a viz Gouere : lidañ a reer er Stadoù-Unanet daou-c'hant hanter-kant vloaz ar Reveulzi amerikan.
- 1añ a viz Gouhere : Keiko Fujimori a zo dilennet da brezidantez Perou, ar c'hentañ gwech eo ma vije ur vaouez e penn ar vro.
- 24 a viz Even : gant daou gren-douar e Venezuela ez eus lazhet 1430 den d'an nebeutañ ha milieroù a dud zo dianket.
- 24 a viz Even : barrad amzer tomm-gor e kornôg Europa. E Breizh ez eus tizhet meur a daol-dreist temperadurioù, en tu all da 40°C e meur a lec'h.
- 22 a viz Even : Keir Starmer (*skeudenn*) a ro e zilez diouzh e garg a gentañ-ministr eus ar Rouantelezh-Unanet.
- 21 a viz Even : e dilennadeg prezidant Kolombia eo trec'h Abelardo de la Espriella, eus an tu-dehoù pellañ.
- 11 a viz Even : deroù Kib vell-droad ar bed 2026 e Kêr-Vec'hiko.



A-zivout ar Wiki

- Evit kaozeal diwar-benn kement tra a denn d'ar Wikipedia brezhonek, kit bep an amzer d'ober un dro betek Tavarn ar wikipedourien.
- Taolit ur sell ouzh ar pennadoù nevez-voulc'het gant hor c'henlabourerien ha roit dorn d'o reizhañ, d'o gwellaat, d'o astenn, d'o fonnusaat. Gallout a ra neb a gar degas kemmoù d'ar pennadoù. Sellit ouzh penaos kemmañ ur bajenn, pe c'hoazh ouzh roll ar fazioù stankañ.
- Porched ar gumuniezh: amañ e kavo ar re nevez ar pep retañ da c'houzout
- Roll ar porchedoù: eno e vo kavet pennadoù a bep seurt

Ha gouzout a raec'h ?

- Ar papigod a oa ur sport poblek e Breizh er Grennamzer.
- Marcel Callo a oa marvet e Kamp-bac'h Mauthausen d'an 19 a viz Meurzh 1945 d'an oad a 23 bloaz.
- Charlez VIII (1470-1498), roue Bro-C'hall ha pried kentañ Anna Breizh, a varvas goude bezañ skoet e benn en ur gourin, e kastell Amboise.
- Ar pizzaioù Margherita zo bet anvet en enor da Margherita di Savoia, rouanez Italia etre 1878 ha 1900.
- Biken ne voe echuet an douger-nijerezioù Graf Zeppelin alaman, an hini nemetañ en istor ar vro ha kroget da vezañ savet e 1936.

- *Terminator the Second* a gont istor *Terminator ar Varn ziwezhañ* en ur implijout arroudoù eus oberennoù *William Shakespeare* nemetken.
- Ken strafuilhet e voe *Nelly Sachs* gant darvoudoù euzhus ar brezel ma tremenas meur a vloaz e bredospitalioù goude an *Eil Brezel-bed*.



Tour ar Papigod e Moñforzh



Ur raktres deus ar Wikimedia Foundation eo Wikipedia.



Adtapet diwar « <https://br.wikipedia.org/w/index.php?title=Degemer&oldid=2185652> »